


Peskig arc'hant


Diskan :

Peskig arc'hant, peskig glas,
O neuial 'barzh ar mor bras,
Lavar din 'ta pelec'h out bet
Ha petra a peus gwelet

Me am eus graet tro ar bed,
'n ur c'hoari gant ar stered,
A gustum sellet en dour
Evel en ur melezour



Foñs ar mor a zo livet
Gant kaerañ livioù krouet
Ar bejin eo hor bleunioù
Ar c'hregin hor bravigoù



Peskig me 'yelo ganez,
Da dañva da levenez
Ebatiñ mintin ha noz

Dle bezañ ur baradoz

Faziañ a rez bugel,
Du-mañ ivez 'z eus brezel,
Ar re vihan gant ar re vras,
'zo bet lonket a viskoazh

